

KANTIK SANTEZ BARBA

PATRONEZ AR VENGLEUERIE (1)

TON : *Mari hor mam^mgarantézuz,*
~~pa : Doue, Eilenn.~~

DISKAN :

Ma fatronez, santez Barba,
 Ken mad 'vidon bete vrema,
 O, me ho ped, ma diouallit
 Dreist oll deuz ar maro subit.

1.

Me zo eur paour kez menglenier
 Tenn ha danjeruz ma micher ;
 Ma fatronez, en han' Doue,
 Beillit dalc'hmad var ma bue.

2.

Pa ziskennan doue er vengleuz, *10*
 Ma ran, siouaz ! eur gamed treuz, */mm*
 Setu me sklapet var ma fenn */*
 Euz ma buë torret an neuden. */tort*

(1) Al loden vrassa euz ar c'hantik-ma zo bet
 gret gant an Dufron Coer, person ar barrez.
~~XX XXXX XXXX~~

3.

Ar pezh am laka da grena
 Ne ket an dour o tivera :
 Kalz danjerusoc'h eo ar vein
 A c'hourdrouz kuezha var ma c'hein.

/ No'e

4.

Beillit varnon, Patronez ker,
 Ma diouallit e peb danjer ;
 × Pellañt falc'h ar maro treitour
 × / ~~E-tad~~ ma c'houisk pe ma labour.

/ Ypad

5.

D'am zro, herio/santez Barba,
 Me a ra doc'h eur bromessa
 Hed ma buë 'fell din tec'het
 Euz ar vesventi milliget.

/ /:

6.

Var ar pemde me labouro/
 Ha da zul me a ehano ;
 En ofern e pedin Doue
 Da gaout true ouz ma ene.

/

7.

Bep mintin, arog ma devez/
 Ma fater 'larin gant evez ;
 Ha pa vo poent mont da repoz,
 'Larin ma feden euz an noz.

/

8.

Ha ma vein e guir gristen,
Ma karin Doue da viken,
Ma vezin ato diouallet
Hed ma buë diouz peb pec'hef. /d

9.

Ha pa vo tost heur ar maro,
Gant ho sikour me resevo
Ma zakramanchou diveza
Da vont d'an env da ziskuiza. ~~XXX~~

Imprimatur :

Quimper, le 24 Octobre 1901.

E. FLEITER,

Vic. gén.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

~~XXX~~ Couel ar Zanter a zigouez dar bemp a viz Kerzu.
Lun tra gaer eo guelot ar Vengleuerien en offerm, da
vouel Zanter Barba. Kaly kaeroch e ve c'hoaz, ma karfente
pe en derez-se, pe dar zul tosta, mont da gommunia en honor d'ho fatonap